

bremañ

AR GURDED

MERZHERINTI UR BOBL

Bastia miz Ebrel '91

Kenvroiz ker, Yannig Baron en deus graet harz-debriñ e-pad ur miz. Bremañ eo tro Michel François. Poent e oa d'an emsaverien sevel o chouk. Hetiñ a ran e vo ur bern emsaverien o cheñch form ar stourm e Breizh, e mod all e chomo Pobl Breizh ur bobl glemmicher.

An holl araokadennoù e Breizh zo bet gounezet gant ar stourm. N'hon eus ket soñj eus ar bloavezhioù 1969ha 1972 ar pezh a oa FLB ? Tostoc'h ouzhimp ... Gilbert Kabon warlene ... unnek miz 'barzh an toull-bac'h ; evit petra ? Mann ebet. Koulskoude un den a enor ha kalon. C'hoarzhel 'm eus pa 'm eus lennet ho kazetenn a lare : "Breizh he deus gounezet". Petra ? Sur a-walc'h e soñje Gilbert kaout muioc'h evit bro Breizh. Poent eo d'an emsaverien ober un tamm emvann. Ha c'hoant 'm eus da lâret dezhe lenn levr. Morvan Lebesque "Comment peut-on être Breton", Xavier grill "Le Cheval Couché", Loëiz ar beg "Les bretons et la Révolution". Warlerc'h, ma n'hellont ket ober o dielfennadur ; dezhe da gousket. Gortoz ma raio ar gouarnamant un nebeut postoù evit Diwan sur a-walc'h. Diwallit, n'eo ket ret bezañ re laouen ; poultr 'barzh hon daoulagad. Ret eo goulen start. Ret eo gouzout un dra c'hoazh ; dieubidigezh hon bro zo bet graet dalc'hat gant un nebeut tud, kalonek ha resis. Ar pap pouezhusañ zo c'hoazh ganeomp. Labourerien zo, ekonomiezh zo, frammadur zo ; ze e oar Bro C'Hall. E Breizh eo ret tennañ gounid eus ar stad gwir.

N'hon eus ket ken ur bern amzer. Ur spi memestra, re yaouank "Dazont". Deskomp dezhe stourm, ha n'eo ket gouelañ.

Digarezit ma 'm eus graet un nebeut fazioù brezhoneg. Ma zad ha ma mamm a gomze dalc'hat e brezhoneg ; skrivañ hon yezh, ne ouient ket. Desket 'm eus ma-unan.

N'ouzon ket hag-eñ e servijo ma lizher d'ober un tamm sklerijenn, c'hoant 'm boa da lavaret se d'ho kazetenn Bremañ.

Trugarez deoc'h holl. A-galon ganeoc'h. Bevet Breizh Dieub. Richard Le baler

BEVAÑ E BREZHONEG

DOR ZIGOR WAR AR BREZHONEG



Bernez Tangi

Emiz Here 1990 eo bet savet ar gevredigezh Dor Zigor e Kemper. Savet eo bet evit reiñ lu da Gempenn, ha d'ar re a zo o c'hom ar parrezioù troido, chomet stag ouz ar brezhoneg pe zedennet gant ar yezh, d'en em anavezout ha d'en em gavout kenetrezo evit komz brezhoneg ha reiñ tu d'ar re a zo o taskiñ hor yezh d'ober ganti er vuhez bemeziek. Abaoe m'eo bet savet ar gevredigezh, eo bet klasket derc'hel d'he c'her-stur ; bep miz eo bet roet tro d'an dud d'an em gavet a-gevret pe an-dro d'ur banne, d'ur pred, pe en ur vale dre ar vro ha selaou displegañ petra 'zo c'hoarvezet el lec'h-mañ-lec'h. War gresk e ya niver an izili a-hed ar sizhunioù ; ouzhpenn 60 ezel a zo bremañ hag ouzhpenn 100 a vo a-benn nebeut.

Evit diskouez pouez ar brezhoneg hag ar vrezhonegerien e Kemper, eo bet divizet digeriñ brasoc'h c'hoazh dor ar Brezhoneg gant un nebeut darvoudoù foran a zegoueza adal an 30 a viz Ebrel betek ar 4 a viz Mae :

- A-hed ar sizhun, e vo, en Ti-post, un diskouezadeg diwar-benn : "Lec'h ar Brezhoneg e-touez yezhoù Europa".
D'ar Meurzh 30 a viz Ebrel da noz, e vo klevet ar strollad "Tud" e ti hor mignon Kristian, er "Celli Bar".
D'ar Yaou 2 a viz Mae, e sal ar C'Hoche, e teulio Gwenole Ar Menn, da zisplegañ deomp hon anvioù-familh hag o zalvouddegezh.
D'ar Gwener 3 a viz Mae en ostaleri "Chez Paul", e vo klevet ar barzh Bernez Tangi o tibunañ hag o kanañ e varzhonegou, ha gantañ ar ganerien Arnaud Maisonneuve ha Per-Varl Kerloc'h.
D'ar Sadorn 4 a viz Mae er c'hoariva, e klevimp gwerzhioù Yann-Fañch Kemener ha Youenn Gwernig, hemañ distro war al leurenn evit ar wach kentañ abaoe 10 vloaz, ha gantañ 8 muzisian !
Erwan Tranvouez (evit burev Dor Zigor)

KURDISTAN

EUZH O URZH KOZH

Un urzh nevez evit ar bed ... Sed an ijinadenn ne oa nemet komzoù goulo. D'ar Yaou 18 a viz a zo bet embannet dre holl evit lakaat ar Ebril e oa deut Kamal, dileuriad Ensavadur c'hedveno da chom hep sevel a-enep da vrezel Kurd Pariz, da Roazhon, da gelaouiñ ur saliad pleg-mor Arabia. Splann eo bremañ d'an holl a dud diwar-benn merzherinti e bobl.

Gant Emgann-Roazhon, Unvaniezh Demokratel Breizh, ha Rouges et Verts Il-ha-Gwiliun e oa bet aozet an emvod. Araok ma vije kaoz eus ar C'Hurdistan e oa bet divizet e vije kenlabour etre Emgann hag U.D.B.. An darvoudoù o deus lakaat an daou strollad da lakaat




Kamal e-pad emvod-kelaouiñ an 18

buan o diviz er pleustr. Talvoudus-kenañ e oa bet an emvod. Un dra vat e ve pediñ Kamal da gomz e pep lec'h e Breizh. Goustad e komz Kamal, from ha ster e pep ger. Diskouez a ra ez eo kalz gwastoc'h c'hoazh stad ar Gurded eget ar pezh a c'heller gwelet war skramm ar skinwel ...

Un tamm istor

Abaoe tost da dri mil bloaz emañ staliet ar Gurded e-lec'h m'emañt. Unan eus pobloù koshañ ar rannved-mañ ez int eta. Komz a reont ur yezh



eus familh an iraneg. Er seizhvet kantved en em gavas an Islam. Adalek ar mare-se e voe klasket arabekaat ar Gurded. Etre an 10vet hag an 12vet kantved e voe savet priñselezhioù gant ar Gurded. Ur sevenadur pinvidik a ziorroas. An destenn gurdek koshañ a zo deuet betek ennomp a zo bet skrivet e 1695. Un danevell-vaer eo a c'halv ar Gurded d'en em unaniñ evit ober ur vro eus ar mouriadoù enebet. Er c'hantvedoù da heul en em unano ar Gurded gant an Durked evit lakaat ar Bersed da gilañ. Un tamm peoc'h ha frankiz bennak a voe lezet dezho neuze. E penn kentañ an XIXvet kantved e voe klasket lemel ar frankizoù-mañ diganto. Bec'h hag emsavadegoù a voe neuze e 1806, 1818, 1832, 1853 ... Ha setu ar Brezel-Bed kentañ, ha, dija, promesa un urzh nevez, un digarez istorel da ziluziñ un toullad mat a gudennoù harzoù ... E 1920 da gefiver feur-anglev Savres e komzer a sevel ur Stad Kurd. Ar

memes bloavezh en em sav ar Gurded ne c'hellont ket mui padout gant promesaoù hepken ... Gant ar Saozon e vo mouget an emsavadeg ... gant ar Saozon hag ar c'Hallaoued e vo treset harzoù ar rannved-mann, harzoù a zo deuet da vezañ sakt abaoe ... E 1923, ar gurded och emsevel adare. Bloavezh feur-anglev Lausanne eo ivez 1923. D'ar blotoù eo bet kaset an danvez-Stad Kurd. Troc'het e vo neuze pobl ar Gurded etre meur a damm a-enep d'o youl. E 1924 e vo berzet groñs ober gant ar c'hurded e Turkia. 72 dileuriad kurd a vo skarzhet eus ar Parlamant. Etre 1925 ha 1938 ne baouezo ket ar Gurded a stourm e Turkia. Etre 300 ha 400 000 a dud lazhet a vo. Mouget e vo ar gurded betek klask diverkañ o yezh hag o anv. N'eus ket Kurded e Turkia, "Turkiz ar Menezioù" ne lavaran ket. Ur maer en devoa paket 36 vloaz toullbac'h evit bazañ bet klevet o komz kurdeg ... Brasat torfed e Turkia !

Goude an Eil Brezel Bed

E 1945 e vo krouet ur republik kurd war dachenn ar Stad Iranat. Goude ur stourmadeg armet e vo savet ar republik-mañ. 11 mizvezh e vo Republik Emren Mahabad gant Qazi Mohammed en he fenn. Gant armeoù an Iran e vo lakaet an urzh da ren endro ...

E Turkia e kendalc'h ar gwaskerezh. Alies e vo lezet arme Turkia da zont da lazhadegañ war dachenn Stad an Irak. Kudenn ebet gant an harzoù e degouezhioù 'zo ...

E Siria ar Gurded n'int nemet kaodediz a eil renk. N'o devez ket ar gwir da ober studioù er skolioù-meur, da skouer. Ar re a c'hell a ya da vBeirut da studiañ eta.

War dachenn Stad an Irak an hini eo e c'hoarvez ar pep gwashañ avat. Setu ar pezh a lavare Sami Apdubrahman, pennsekretour S.P.K. (Strollad Pobl ar C'Hurdistan) e miz Gwengolo '90 : "En ur ober un nebeud bloavezhioù ez eo deuet maezioù ar C'Hurdistan war dachenn Stad an Irak da vezañ un doare dezerzh ma ne gresk mui seurt ebet. En tu-hont da 4000 kêriadenn a zo bet diskaret hag e-tro 25 kêr a zo bet distrujet penn-da-benn. Ar pep poanusañ evidomp avat eo chom hep gouzout petra eo deuet da vezañ an 50 000 den a zo aet diwar-wel, hag int yaouank evit an darn vrasañ. Daoust ha kaset int bet da gampoù en dezerzh war-du Jordania, peotramant d'an takad digenvez anvet Bro-Hadari, er mervent da Mossoul ?"

E-pad brezel ar Pleg-Mor e klevet kazetennerien o lavaret : "arabat kehveriañ Saddam Hussein ouzh Hitler, Arabat satanekaat penn Bagdad ...". Daoust hag evit prientiñ ar c'hedvenno d'ar fed ne vefe ket diskaret renad Saddam Hussein e oa ? Ha koulskoude pa glever sifroù 'zo ne c'heller nemet soñjal ez eus ur youl dibleg da zistruj ur boblad en he fezh, paotred, merc'hed ha bugale. 200 000 Kurd lazhet en ur ober un nebeud bloavezhioù. En tu-hont da 1,5 milion a dud lakaet e kampoù-bac'h. Hag evit bezañ "efedusoc'h", evel Hitler, implij an armoù kimiek. Komzet ez eus bet katzig eus kêr Halabja, bet bombezat e 1988 gant gaz. 4000 den a oa bet lazhet ha miliadoù a re all glozet. Ne oa ket ar



Krennlavar : "Ul leon eo al labour, krog e-barzh hag e teulo louarn" eme ar Gurded

wech kentañ da arme an Irak ober gant seurt doareoù avat ... Spontusoc'h-spontusañ eo bet ar bombezadegoù a-hed ar bloavezhioù a-drugarez da skoazell efedus kompagnuzhioù gall hag alaman ...

Gant trec'h an Amerikaned er C'Howeit e soñje da lod e oa echu Saddam Hussein. O faziñ e oant. Interest ar Stadoù-Unanet hag Europa ar C'Hornog eo e chome ar galloud gant Saddam Hussein. Ma vefe ur gouarnamant "re" zemokratel en Irak, ur wech bennak, e c'hellfe reiñ mennozhioù da bobloù all, da re ar C'Howeit hag Arabia Saoudi pa ne ve ken ...

Er C'Howeit e chasear hiziv ar Baletinianed evel pa vijent lapined. Un doare sport eo deuet da vezañ evit mibien ar bitaoded ... Ma ne vije ket bet kaset soudarded c'hall da Arabia Saoudi gant Giscard, er bloavezhioù '70, e c'hellfe bezañ hiziv ur renad demokratel er vro-hont ...

Ober ?

Ar pezh a c'hoarvez hiziv er C'Hurdistan n'eo ket nevez siwazh.

Divroadegoù all a zo bet d'ja. An hini a welomp er mare-mañ war skramm ar skinwel a zo kalz brasoc'h ha gwashoc'h eget ar re gent avat. 3 milion a dud zo en arvar.



Ur c'hurd kavet gantañ ur pallenn plastek

Ret eo ober "un dra bennak" buan evit ma varvo an nebeutañ posubl a dud. Tri chomlec'h a gavoc'h e traoc'h ar pennad-mañ. Embann dibaouez kiriegezh Stadoù ar C'Hornog a zo d'ober ivez.

Stourm a-enep d'ar Stadoù sunerien-wad ha pilpous hon eus ni d'ober. An deiz ma vo roet lamm d'ar Stad C'Hall e Breizh e vo un trec'h bras evit ar Gurded.

Per al Lez



Ur bugel aet da glask dour en un toull-skorn ; ha bev eo c'hoazh ?

Chomlec'hioù :

Institut Kurde de Paris
CCP 573895E Paris
106, rue la Fayette,
75010 Paris, bro-C'Hall.
☎ 48 24 64 64

Aide Médicale Internationale
CCP 4544V
119, rue des Amandiers,
75019 Paris, Bro-C'Hall
☎ 46 36 04 04

Pharmaciens Sans Frontières
113631U Clermont-ferrand
4, voie militaire des Gravanches
63000 Clermont-Ferrand Okitania
☎ 73 90 81 34

Torret en deus Parlamant ar C'Hevredad Tchek-Slovak ar gwir war ar skingomz hag ar skinwel a oa miret gant ar Stad. Ar Republikou Tchek ha slovak a c'hello reiñ aotreoù d'ar re a venn ober war-dro ar skinañ. 51 gevredigezh evit ar skinwel ha 83 c'hevredigezh evit ar skingomz o deus goulet aotreoù. Enebiñ a ra

SKINOU
DRE
AR BED

kannidi slovak ouzh ar skinañ e yezhoù ar minorelezhioù avat.

TV- France a vez skinet e Argantina abaoe ar 15 a viz Ebrel avat. Ur chadenn evit ur 150 000 bennak a c'hallegerien "skingaset" dre fard e-pad 6 eurvezh bemdez : abadennoù dudi, lennegezh hag ar c'heleier a zo tu da welet.

YVT

UR SOÑJ KOZH ADKAVET

E 1929 an hini a voe savet ar c'helc'h kentañ gant labourerien-douar yaouank eus ar vro, e-kostez Kedalnai, e-kreiz ar vro. Unvanlezh ar c'helc'hioù a voe krouet e 1936 ha kenkent e tue e-maez he c'hazetenn "Jaunasis Ukinkas"

(Al labourer-douar yaouank). Aozet e veze diskouezadegoù, kaozeadennoù, baleadennoù ; diorroet e veze skiant al labour-douar. Sevel a rae an niver a izili da 40 000, bodet e-barzh 1000 kelc'h bennak er bloaz 1940.

Adsavet e oa an doare kelc'h-se e 1989 gant labourerien douar yaouank, kenkent ha ma oa bet adreet sevel aozadurioù distag digomunour. Ur c'huzul-merañ a voe savet ivez hag ur gazetenn, hañval hec'h anv ouz an hini araok ar brezel, a grogas da dont e-maez. Diskouezadegoù zo bet aozet c'hoazh e-kerz an diskar-amzer tremenet.

E skolioù eil-dere, e 60 skol labour-douar, en Akademiezh al Labour-Douar, e Skol Gelennerien Vilnius hag en Akademiezh Medisineriezh-Loened an hini a vez kavet kelc'hioù hidiv. Digor int d'an holl dud yaouank, adalek 10 vloaz (!) betek 30. Etre 5 ha 50 a gaver e pep kelc'h.

Lakaat ar re yaouank da dommañ adarre ouz ar vuhez war ar maez, ar sevenadur ar micherioù hag ar binvidigezh ennañ, prenañ skiant war al labour-douar modern an hini eo paliou J.U.R. (Jaunuji Ukinku Ratelija).

Kaset e vez ar paliou-se da benn dre oberioù a bep seurt : pleustriñ oc'h-unan war al labour-douar en o zamm liorz, studiañ doareoù gounit-douar nevez ha modern, aozañ devezhioù-studi, kaozeadennoù, gouelioù, setu aze petra a ra izili ar c'helc'hioù dre ar vro, en tu hont d'o labour pe d'o studi. Distag eo ar c'helc'hioù J.U.R. diouzh pep kostezenn bolitikel, ha n'eo ket un aozadur-stad kennebeut, goude ma 'ch eo diskleriet hervez lezenn.



Lituaniz e-tal d'ar Soudarded

Labour douar Breizh ha Lituania

E miz C'Hwevrer, evit ar bloaz, e oa deut daou ezel eus J.U.R. e Strasburg da gemer perzh en ur vodadeg o plediñ gant aozadurioù Labourerien-douar yaouank en Europa.

E fin miz Meurzh e oa deut Alvydas Malinauskas, sekretour kuzul-merañ ar c'helc'hioù, d'ober un tamm tro e Breizh, e Brest hag e Lannuon. Araok retourn en e vro, dre Bariz, en doa gwelet daou venaj e Ploueg-ar-Mor.

Komite Skoazell Breizh Poblou Balt a zo o klask, er c'hoñvers-se, tud a youl vat, labourerien-douar pe labourerien er stalloù aozañ boued, pe izili eus sindikadoù labourerien-douar, a vije

pad da degemer Lituaniz yaouank e-pad un nebeud devezhioù, a-benn diskouel dezhe hon bro evel-just, hag ivez hon doareoù-labour. Ret eo gouzout e tle Lituaniz bazañ pedet, pe ganimp war hon anv-ni pe war anv un aozadur bennak (pedadenn ofisiel). N'eus nemet en doare-se e tapont ober beajoù er C'Hornog.

N'eo ket laret, sur a-walc'h, e teuje bernioù Lituaniz raktal. Met e kenkaz e kavje darn anezhe an tu da dont, e vije mat gouzout da belec'h ha gant piv kas anezhe, an abretañ ar gwellañ.

Goulenn a c'heller hiroc'h ouz komite Skoazell Breizh Poblou Balt e ti Joel ha Silvi Donnart, Ru Simon, 22470 Ploueg-ar-mor.

Joel Donnart
13-04-91

UL LITUANAD E BREIZH

Ur paotr bras eo Alvydas MALINAUSKAS, tres sioul gantañ. Ne oa ket deut en hon bro evit c'hoariñ e dourist, met evit prezegenniñ, asambles gant Leonid PLOUCHTCH, d'an 30 a viz Meurzh, diwar-benn stad ar Broioù Balt. Sekretour Kuzul-Merañ Kelc'hioù Labourerien-douar Yaouank Lituania eo Alvydas, deut e oa er Frañs evit ilammañ darempredoù gant tier-bank, ha deut eo bet e Breizh evit komz e plas ur gannadez bet dec'halvet en-dro gant Vltautas LANDSBERGIS. Ne c'halle ken neuze kemer perzh er brezegenn aozet gant Skoazell Breizh-Poblou Balt e Lannuon.

deomp fotoioù eus darvoudoù mantrus Vilnius, hep seblantout bezañ frommet, daoust dezhañ bezañ bet eno d'ar mare-se. Ouzh an amzer da zont e sell. N'eo ket truez e oa deut da gerc'hat amañ, met sikour pleustrek.

Daoust d'ar pezh he deus e bobl da c'houzañ, ne deus ger garv ebet gant Alvydas Malinauskas pa gomze diwar-benn ar Rusianed. An dra-se a lak ac'hanomp da fiziout e Leonid Plouchtch pa lavar : "En un doare speredek en em ren ar valted ; gouest e velenf da guitaat URSS en un doare peoc'hiek". Ne vezer ket souezhet kennebeut o klevet ez eus bet goulnnet gant Moskoviz 'zo ur viza digant dileuriadur Lituania a-benn mont di da vevañ, kerkent ha ma vo emren !

Hag evit dizolioñ

Met ouzhpenn testenianh ha goulnenn sikour en doa graet Alvydas amañ. C'hoant en doa gouzout ha dizolioñ ar muiañ a draou ma c'helle. Tro en doa, e-pad an tri devezh bet tremenet gantañ e Breizh, da deskiñ kalzik a draou diwar-benn sevenadur hor bro. Klevet en doa bet anv anezhi pa oa er skol, ha netra ken. Lakaet en doa Kichen-ha-kichen stourm Lituaniz hag hini ar Vretoned evit o yezh : "Eveldomp, n'ho peus ket trawalc'h a gazetennou nag a abadennoù tele en ho yezh. Met koulskoude war ar gudenn-mañ eo gwelloc'h an traoù e Lituania ...". Ya sur eo gwelloc'h an traoù evit al lituaneg eget evit ar brezhoneg. Ret eo da Lituaniz deskiñ rusianeg yaouankoc'h-yaouankañ, gant un eurvezh kentel bemdez, met n'eus nemet 27% a skolioù rusianek er vro, a vez darempredet gant minorelezhioù bielorusian, polonat pe ... rusian. Kaset e vez an darempredoù melastradurel e rusianeg met ne vir ket d'an holl Lituaniz kouz lavarat d'ober gant o yezh en degouezhioù all eus ar vuhez. Marteze a-walc'h eo bet souezhet Alvydas o welet ez eus ur stourm eus disavel bugale e brezhoneg e Breizh !

Kuitaat hon bro an doa graet Alvydas Malinauskas gant ar soñj, ma 'zo sur, distreiñ kerkent ha ma vo posubl dezhañ. Evit e vicher evel-just : anavezet eo pouaz al labour-douar amañ. Met ivez peogwir en deus gwelet ez eus amañ ur sevenadur o klask chom bev, evel e hini.

Silvi Donnart



Plouchtch ha A. Malinauskas e Lannuon

Evit testenianh ...

Berr-tre eo e gwirionez ar pezh en doa Alvydas da lavaret, gant ar sklaer m'eo an traoù evit Lituaniz. Gwallgast gant galloud Moskov, e rankont stourm dizhan evit mont eus dindan e grabanoù. Evel un den o kerzhet el lec'hid eo pobl Lituania ; ma chom a-sav e vo lonket gantañ. Met ne chomo ket a-sav ; leun a youl eo-hi. Buanoc'h memestra e valefe ma vefe sikouret gant broioù ar C'Hornog ; leun a spi eo-hi.

Goulenn a ra ar stadoù balt bezañ anavezet gant stadoù ar C'Hornog. An arakadenn diplomatek-se a rofe kalz nerzh dezho : ne c'helle ket Moskov ken nac'h divizout ganto. Bank ar Frañs a c'helle reiñ en-dro an aour bet fiziet ennañ gant Lituania dizalc'h. Evel pep tra eo kreizennet an ekonomiezh e Moskov. Keit ha ma tremeno an archant dre Voskov, ne c'hellint ket gwellaat kalz stad an ekonomiezh er Broioù Balt. Chom a ralo kamm ivez ma ne vo ket roet an tu d'ar Valted dont da welet penaos e vez

labourat amañ. Da soñj Alvydas Malinauskas ha L. Plouchtch n'eo ket ar Broioù Balt prest da gemer perzh en ekonomiezh kapitalour abalamour ma 'z int chomet re ball (dra ret) troet war-zu URSS nemetken. Evito, ne c'hellint ket bazañ staget ouz kenvarched Europa araok bloavezhioù ; ret e vo dezho da gantañ evel-just gounit o emrenezh, ha da c'houd sevel ur c'henkevredad gant broioù all eus ar Reter, evel ar Pologn ha Tchekoslovakia.

Lituaniz, evel Latviz hag Estoniz, o deus da stourm a-enep ar fae bras-spontus a-berzh ar Rusianed. Tud faoùs hag a deu da vezañ faoùs e degouezhioù 'zo, da skouer e-keñver ar baotred yaouank oc'h ober o c'hoñje en arme soviedal. Meur a hini anezho, pa ne oant ket gouest da c'houzañ pelloc'h krizder ar soudarded all, a zo en em lazhet ... Ha gwelet hon eus e miz Genver penaos e vez klasket digalonekaat en URSS un engroez habask. Diskouezet en doa Alvydas

450 BUGEL E PWLLHELI

EWROSGOL 91 E NORZ BRO-GEMBRE

E-pad pevar devezh ez eo en em gavet un tropad tud yaouank e Kembre deuet eus a bep korn Europa. E ker Pwllheli e oa lec'hiet ar gouel, strivoù a oa bet graet gant an holl, betek ar stalioù kenwerzh klenket gant bannieloù pep bro, ha skritelioù bihan e pep lec'h skrivet warno : benvenuto, bienvenuto, benvevuda, croeso, degemer mat, falte ...



Bugale Breizh, fur evel aeled e-pad lid digerin Ewrosgol.

D'ar yaou 4 a viz Ebrel eo bet roet lañs d'an eil Ewrosgol gant un dibunadeg vras a dreuz kêr, arack en em gavout holl a-gevret en deltenn vras gwenn evit al lid-digerin. Ar Vretoned a zo bet merzhet avat, dre ma oa bet gentañ (70), met ivez dre ma oa bet gwisket ganto ur sweat-shirt gwenn ha du bet savet a-ratoz-kaer evit an darvoud. Kejet hon eus aze ouzh Okitaniz, Katalaniz, Sloveniz, Sorabed, Frisoned, Alamaniz Denmark, Danis Alamagn, Skosis, Iwerzhoniz ... ha Kembreiz.

Dreist eo bet aozet an degemer evit ar vugale. Sonjit ! An holl a oa lojet o-unan pe a-zaou er familhoù. Gellit o deus evelse dizoloñ buhez un tiegezh kembread.

Plijadur e-leizh !

Ar c'hoarioù o deus plijet d'ar re yaouank ivez, diouzhtu int bet "barzh ar jeu ! Hag ar maout er c'hoari "Rugbi Dragon" a zo aet gant Skolaj Roparz Hemon !

Dudi ivez e-kerz an nozvezhoù, dreist-holl gant abadenn "Euroroc" gant E.V. hag en deus lakaet he holl energiezh evit plijout dezho. Niverus e oa dija o "Fan", met daougemented int bet sur ! Menegomp ivez pezh-c'hoari Strollad ar

Vro Bagan. Lod eus ar re vras a oa e-keit-se o pledin gant deskin ar yezhoù d'ar re vras ha kavout hentennoù pedagogel boutin. Petra lavarout ouzhpenn ? Nemet bevet Euroskol 93 hag a vo dalc'het e Fris e miz Ebrel 93.

Helena Riou



Mark Boivin, animatour ar Breizhiz, o tegemer profoù ar C'Hatalaniz

SKOLIQU-MAMM IWERZHONK BÉAL FEIRSTE

SKOAZELL DIGANT UR "FIZIADUR"

Displeget hon eus e peseurt enkadenn e Ireland Office, ar gouarnamant-rannvro, bout oa tapet seizh skol-vamm iwerzhonek e nac'het kendalc'her da reiñ arc'hant evito da Kornog Béal Feirste goude d'an Northern c'hGlór na nGael hag a rae war o zro.



skorañ a-berzh Stad ar strivadoù a vez graet gant kevredigezhioù prevez a-du gant an iwerzhonek.

Bremañ ez eo bet divizet reiñ d'ar fiziadur-se £ 750 000, un drederenn o tont eus kef ar Rouantelezh Unanet ha div drederenn eus hini ar Gomision Europat. Ar c'havala-se n'eo ket da vezañ dispignet met lakaet da c'hounit kampi hag a savo da £ 75 000 pe £ 80 000 ar bloaz. Lod eus an arc'hant-se a yelo d'ar skolioù-mamm. Lod ? Ne lavarar ket c'hoazh pegement. Nebeutoc'h e vo eget ar pezh a roe ar Stad a-rack, peogwir e oa £ 90 000. Ha ne vo ket roet dre hanterouriezh Glór na nGael daoust ma kandalc'h an aozadur-mañ da verañ ar skolioù ; war-eun ez aio d'ar re-mañ michañs. Dija ez eus bet roet £ 700 da deir skol -dister a dra e gwirionez- evit o harpañ da brenañ dafar ha ... da c'hourdonañ diroerorien-vugale. Ne vo ket implijet ar c'hampi evit goprañ mererezh ar Fiziadur, peadra zo gouestlet d'an dra-se a-du arall.

Un dro vat zo c'hoarvezet en afer-se e miz Ebrel. Harpet e vo ar skolioù gant ur c'hevredad anvet Ultach Trust, Fiziadur Bro-Ulad. Hemañ a oa bet savet daou vloaz 'zo gant ar mennad



Kendalc'h Keltiek Etrevroadel

Pell amzer eo bet ar C'hendalc'h Keltiek al liamm kreñvañ etre ar broioù Keltiek war danvez ar sevenadur, an armerzh hag ar c'helenn. Aozadurioù ispisializet a zo bremañ pe war ar sonerezh, pe war ar filmoù. Chom a ra ar C'hendalc'h al lec'h-kejañ nemetañ hag a ra ul liamm etre ar sevenadur dre an holl stummoù anezhañ, kelenn ar yezhoù keltiek, an armerzh ha dazont hor broioù.

Er bloaz-mañ e vo ar C'hendalc'h e Dulenn (Iwerzhon) 29/07/91- 03/08/91 e skol-veur vroadel Dulenn 4.

Priz : Lojeiz evit pemp noz, tri fred bemdez, sonadegoù, baleadennoù dre garr-boutin : 140 lur Iwerzhonat.

Evit rezerviñ, a-raok dibenn miz Ebrel, ez eus tu da skrivañ war eelun da :

EIBHLIN NI CHATHAIRIABHAGH
RUNAI OINGH, CRAOBH NA HEIREANN
83 BR SANFORD
BAILE ATHA CLUATH 6, IRELAND
KENDALC'H KELTIK,
LOK CHAPEL, 5, STRAED BERLIOZ,
29600 PLOURIN MONTROULEZ

Prezidantez Glór na nGael e Béal Feirste he deus disklêriet bout laouan a-walc'h gant ar renkamant-se. Nac'het eo koulskoude o soñjal ez eo tuet an NIO, pa gomz eus an iwerzhonek, da ouestlañ arc'hant d'ar studioù skolveuriek kentoc'h eget da ledañ an anaoùgezh hag ar pleustr eus ar yezh e-touez an dud dre vras, evel ma klask ober Glór na nGael.

Setu neuze Komision Europa o lakaet un tamm mat a arc'hant a-gostez evit harpañ an iwerzhonek. Ha ma vefe goulnnet kement-all digant evit skoazellañ ar skolioù-mamm brezhonek ? Prenañ dafar, gourdonañ skolarien ? pe daoust hag e vefe ret d'ar Stad C'Hall bout perzhiek en ur "Fiziadur Breizhat" hervel ouzh hini Bro-Ulad ? Hag e kavle ar voereb digarez neuze evit krannañ an nebaduz a vez roet ganti evit hor yezh bremañ ?

A. Heussaff

Parlant romanek o tont eus al latin-izel

AMHEOL AR WELCHEG

E Bro-Elzas, n'eus mui nemet un toullad tud o komz welcheg, ur yezh o tont war-eeun eus al latin-izel. An testoñ diwezhañ int eus ur yezh a yelo da get ac'hann ur rummad.

Abae pemzek kantved, war un dachenn a-us da blaenenn Elzas, a-blom da gKolmar e vez komzet ur parlant romanek o tont eus al latin-izel hag un nebeud garioù keltek ennañ. Trec'het eo bet ar yezh-se gant sevenadur teknikel an XIXvet kantved. Hiziv, nebeutoc'h eget 2000 a dud, tud tozh evit an darn vrasañ anezho, eo testoñ diwezhañ ur yezh a vo aet da get ac'hann d'ur rummad.

War ziskar

"E Labaroch e hon kontet 390 a dud o komz trefodach diwar 1600 a annezerien. E-barzh kanton Lapoutroie ez eus sañset 1500 en holl. Hag un nebeud degadoù ouzhpenn er penn pellañ da draoniennou Villé, Sainte-Marie-aux-Mines pe Labaroch". Didruet eo ar gont graet gant Jean-François Million, c'hwech bloaz ha tregont. Unan eus nav ezel akademiezh an trefodach savet e 1977, hag he deus kemeret da gefridi lakaat ar yezh-mañ dre skrid a-raok ma 'z aio da get.

Evit gwir emañ ar welcheg oc'h ober e dalaroù. An anv e-unan a ziskouez anat. Evit tud ar broioù germanek ez eo ar Welch ur "Gallan". Adkemeret eo bet ar ger gant rannyezh Vro-Elzas da envel ar C'Hallaoued. Da nebeutoc'h a dregont kilometr diouzh Kolmar ez eo bet miret ar yezh gant diskenidi ar c'hallanromaned, aet kuit en lliwet ha l'Vet kantvedoù da repuñ er menez a-zirak aloubadegoù ar c'hermaned.

Pa gomz eus kêriadennoù bleuñius ar winieg en e dreid, o vezañ anvet Sigolstein, Amerschwir pe Ingersheim en ra ar welchad anezho nemet Marville, Savaumo pe Ingwillé, an hini diwezhañ o tegas war eeun da soñj eus an Ungis Villa roman. Eus menez an Hohnack Bras, 976 metr uhelder, e ra bepred ar Vervone, anv doue keltek an andoniou, Vorvo, hag en deus roet e anv da lec'hioù all, d'ar vBourboule, da skouer.


6000 ger

Yezh ar stourm a-nep aloubadegoù ar C'Hermand, n'en deus ket treuzvevet ar welcheg dreist ar c'hiz-veañ. A-ziwar ar maez, chomet peg en douar, ar yezh he deus c'hwitet penn-da-benn war he

c'henglotadur ouzh an ijinerzh. War-lerc'h un enklask graet e 1983 er skolioù kentañ derez eus ar c'hanton ez eus bet roet da c'houzout n'eus nemet 2% eus ar vugale a gomz ar yezh bamdez. "N'eus mui a abeg da vezañ evit ar welcheg. Ac'hann d'ur rummad e vo echu gantañ penn-da-benn ... Ret eo dimp bezañ gwirvouder. N'omp ket digalonekaet evit kemend-all", a gendalc'h Jean-François Million. Bez' e kaver bepred e c'heriaoueg 6000 a c'herioù, bet embannet 680 skouerenn anezhi e 1985. Kenderv a-bell d'ar reto-romañcheg e Bro-Suis pe d'ar walloneg e Beljia e oa bet komzet a-nevez ar welcheg e-pad an eil brezel-bed. "E-pad ar brezel diwezhañ e oa difennet komz galleg hag an holl dud o nac'h komz en alamaneg a-rae gant an trefodach" en deus doñj Camille Parmantier, forestour war e leve hag en deus soñj eus avizoù e dad-kozh, maer Labaroch: "Komz galleg 'ta. Gant da trefodach ne 'z i kat pelloc'h eget Hachimette", ar gêriadenn e-kichen.

Evit douaroniezh ar rannvro gant ar rummad diwezhañ-mañ emañ bepred plaenenn Elzas "en Allmegg", RFA "l'Aut" coté do Ré" (en tu all d'ar Roen), ha departamant ar Vojez "deri touta" (a-dreñv kement-se).

E Loren romanek ez eo ar memes tra evit an trefodachoù, nemet daou rummad



muioch ouzh hen komz eget evit ar welcheg. Ma teue aes an trefodach gant va zud-kuñv, ne oar va zad nemet 400 a c'herioù hag a droioù-lavar ha yaouankizoù va oad ha me, 150 lost da vat. Gwashoc'h e teu an traoù gant ar vugale a-vremañ ne gomprenont nemet pemp pe c'hwech ger.

Yaouankizoù va oad a vez o chom e Nancy pe e Metz evit o studioù pe o labour, hag er c'hêriadennoù e teu tud eus kêr da chom, el "loisamantou" er pennoù eus ar c'hêriadennoù. Setu perak ivez, d'am soñj, ez eo echu gant hon trefodach ha ne blijje ket din ez ale ar brezhoneg gant an hevelep hent.

Setu ar pezh em eus kavet e-barzh bann "un monde loue, fou, fou" va c'hazelenn: Fier ha laouen eo ar "Reter Republikan" o laret deoc'h:

"Kenavo (d'ar brezhoneg). 250 000 a dud a gomz brezhoneg ha 665 000 a gompren anezhañ en tu kornog d'ul linenn o vont a Bempoull (Aodoù-an-Arvor) da Wened (Morbihan) hervez ur studiadenn war implij ar brezhoneg, graet evit Skol-Veur Brest gant ur c'helaouenner eus FR3. En hevelep rannvro e vez lennet brezhoneg gant 125 000 a dud ha skrivet e vez gant 55 000 anezho.


En ur ober seizh bloaz ivez, hervez ar studiadenn, en deus digresket eus ouzhpenn 12% an niver a dud ha skrivet e vez gant 30% evit ar re a gomz anezhi.

Kement ha laret emañ ar brezhoneg war e dremenvar.

Marsi bras d'ar "Reter" evit bezañ roet dimp da c'houzout kemend-all hag en un doare kent truezus.

Andrev Touchet (Jarville)

UGENT MILIARD A LURIOU GALL



Stefani a Monaco gant he c'hi Funny Face ...

A c'hanta ! Nav milion a zo anezhe en Egzagon, a-hervaz, ya, 'gozik div wech muioch eget a Vretoned. Koulskoude e vezont erru mat gant an holl, koulz laret, ha, goude ma ne veont ket, ma ne soñjont ket, na zoken ne debont ket eveldomp, n'eus dalc'h sevenadurel na politikel gante. Jamez ne savo nep politikour e vouezh en oc'h enep: karet e vezont gant ar bras eus ar vaterien. C'Hoarvezout a ra gant pep hini anezhe avat saotrañ hon douar, ha meur a wech bamdez. Ret eo laret ivez n'omp na tost na skrav en o c'heñver tamm ebet. Ugent miliard a lurioù gall nevez ac'h a bep bloaz da vogañ an nav milion-se, hep kontañ amañ, ur milion bennak all evit o lojañ, o louzaouiñ ha me 'oar-me petra ! Ma ! Eus peseurt minorelezh dianav e'ch on

o komz, a gav deoc'h, eus peseurt bro eo deut an estren-se ? Sur on ho peus gwelet anezhe en ho pro, en ho pourk, en ho ti, marse zoken e vez unan anezhe ganec'h dindan ho kador pe war ho kwela. Ya ! Divinet ho peus bremañ. Me n'houljen ket e vijent divroet na lazhet na beuzet. Nann vat. Ne c'houllemjen nemet un draig ha na vije ket, c'honvat, en tu-hont d'hon c'harantez en o c'heñver. Adlakaat an nav milion a loened pevarzroadek-se en o flas ha paouez da reiñ d'o buhez, d'oc'h evurusted ha d'o yac'hed ur pouez dreist da boanioù milionou a dud amañ hag ahont ha na weler ket c'hoazh ober evite pezh a raer evit ar chas ... (ha kement-all a zo gwir ivez evit ar seizh milion a gizhier a zo en Egzagon).

Wolfgang Amadeus Bouzart

BREIZH WARC'HOAZH

BRUDEREZH

500 lur+500 lur+...=Postoù labour e Breizh

Ha sur oc'h e vez implijet ho arc'hant postel ganec'h en tiez bank e Breizh?

Ha sur oc'h e vezo implijet evit sevel postoù-labour?

Raktres K.A.B. n'eo ket sevel un ti-bank all, met kinnig ur benveg d'ar Vretoned, evit sevel embregerezhioù er vro.

Dre prenañ, evit 500 lur an tamm, kenlodennoù ur c'hevredad dre gevrannoù (S.A.), sturiet gant tud ampart ha youlek, e roet un dra fetis evit ma vefe eus Breizh ur vro leun a ijin hag a startijenn, evit reiñ d'ar re yaouank an tu da chom enni.

Ho arc'hant ne c'houlennomp ket c'hoazh, met leunian ur follenn promesañ, kinniget ganeomp, evit prenañ kenlodennoù ar c'hevredad nemetken.

Diwallit: sur omp da sevel ar c'hevredad a-benn bloaz (d'ar 1añ a viz Gwengolo 1991 d'ar muiañ). Daoust hag-eh e viot ganeomp? Evit reasev ur follenn-promesa, skrivit deomp buan:

K.A.B. BP 9 29413 LANDERNE CEDEX Pe Minitel 36 14 Chez*KAB Diouzhoc'h hon eus ezhomm ivez!

Selaouit !

Radio-bro 88.2

Program miz mae 1991 d'ar Gwener noz etre 8 eur ha kreiznoz, ha d'ar Sul veure etre 8e hag 11e.

(Sallit ouzh niverenn 115, miz Ebrel p. 19).

Notennit memes tra e vo skingaset d'an 12 a viz Mae an abadenn bet roet gant Yann Fañch Kemener d'ar 26 a viz Meurzh e Théâtre Dunois e Pariz. Bez e vo ur stand gant Radio-Bro e Karaez da-geñver Gouel Broadel ar Brezhoneg ivez. Radio-bro, BP 639, 75367 Pariz Cedex 08, 07 47 61 00 75

OUZHPENN 40 BRO TAMALLET GANT AMNESTY INTERNATIONAL

Evit lidañ "Devezh ar Merc'hed" ez eus bet embannet gant ar gevredigezh "Amnesty International" un teulad o tiskouez stad ar merc'hed er bed e 1991. Gwallgaset, gwallet, toullbac'het, setu ar pezh a zo bet dizoloet evit ouzhpenn 40 bro. Yaouank pe kozh, dougerez pe get, ar

merc'hed a vez bourevlet, alles evit gallout bac'hañ aesoc'h o gwazed, o breudeur pe o bugale. Gwir eo kement-se evit an Tchad, Sina, Birmania, Turkia, Perou, Sirea, Sri-Lanka, Filipina, Afrika ar C'hreisteiz, Kolombia... Ha marteze tostoc'h ouzhimp : Euskadi, Iwerzhon ...


Gwaskerezh ar stadoù a c'houzanvont, met gwaskerezh ar baotred ivez, skoet ha gwallet gant o fried. N'eo ket ur gwaskerezh all a vez gouzanvet ganto, krizderioù delezek eus ar Grenn-Amzer kentoc'h o nac'h o fersonelezh plac'h. Ouzhpenn 80 milion a verc'hed (er broioù muzulman evit al lod brasañ) a vez rediet da c'houzañv e vefe machagnet o c'horf. "Al lezenn" an hini a c'houlenn start e vefe "oberetaet" ar plac'h evit he glanaat. Lezenn relijiel, pe get, ijinet pe get... met dalc'het betek an deiz a hiriv gant pobloù 'zo.

Pa vezo tizhet an oad a 7 pe 8 bloaz gant ar merc'hedigoù e vo troc'het dezho kement tra hag a zo en diavaez : muzelloù hag all... Marabout ar vro a zeuio d'ober e labour e-giz ur spazher mocti. Na youc'hadennoù, na poan, na spont ar vugale ne laka hini ebet da gilañ. Ne vo ket liv ar from war dremm tud ar familh, na truez an den karget d'ober seurt oberetadenn. D'an oad-se eo poent d'ar merc'hed bihan bezañ "naetaet"...

Ar merc'hed eo a zalcho pe a stago ar plac'hig evit ma ne fiivo ket zoken. Poan euzhus a vo devezhioù ha nozvezhioù pad, ha dreist-holl pa fello dezhi mont da staotañ.

Bugale zo, a varvo un nebeut devezhioù war-lerc'h.

Evit un nebeut broioù, er Mali da skouer, e vo gortozet e vefe deuet ar plac'hig da vezañ ur grennardez. Bihanig eo an niver a glask nac'h o zonkadur..., rak ma ne asant ket ar plac'h yaouank sentiñ ouzh Al Lezenn ne vo plas ebet eviti e-touez he ziegezh. Mezh a vo graet dezhi, skoet e vo, dilezet gant ar familh ha torret, evel just, an darempredoù gant an danvez-pried dibabet eviti. Lezet vo da vervel



Staget vez o daouarn ha divesker ... ha bourevlet e vezont en anv al "lezenn" !

gant an naon, den ne asanto debrñ en he c'hichen pe tostaat zoken ouzh ur plac'h "dichlan" anat deoc'h !

Ha daoust da se, Animata, ur plac'h yaouank 17 bloaz he deus stourmet a-enep d'an holl. Skoet, skarzhet eus he zi gant he zad, argaset gant he danvez-pried, tec'het eo betek bro Frañs. Mamm Animata zo bet dilezet ivez, rak m'eo fall ar verc'h eo dre fazi ar vamm he deus he engehentet ; abeg evit ar gwaz da gemer da bried-nevez ur plac'hig yaouank... Mamm Animata zo 45 bloaz hag e reer dija ur vaouez kozh anezhi. Goulennet eo bet gant Animata statud ar repuñdi politikel, met diasas eo an traoù, rak m'orse c'hoazh, n'eus bet tabutet eus seurt kudenn gant "Emglevioù Jeneva". He alvokadez he deus savet galv.

Petra a raio Animata ma vez nac'het ar statud goulennet ? Distreiñ d'he bro ? N'eus ket pell koulskoude, ez eus bet kondaonet da 5 bloaz toull ur vaouez eus bro Vali tamallet dezhi bezañ mac'hagnet 6 plac'hig, 5 bloaz gant goursez o deus bet o zud. Met ne oa

ket bet komprenet an tamall a veze graet dezho, ha lavaret o deus d'ar varnerien : "Peogwir e vez lakaet an dud en toull amañ, evit hen ober, e tistroimp d'hor bro !"

Hiziv e tarz an traoù e Bro Vali. Skarzhet eo bet an diktator, ar Jeneral Moussa Traore, hag ar bobl a ziskenn er straedoù evit goulenn an demokratelezh... Peseurt hini ? Hag evit piv ? Daoust hag eñ e vo brutaet plas ar merc'hed er gevredigezh nevez a fell dezho sevel ? Daoust hag eñ e vo doujet d'ar merc'hed en o c'horf, en o fersonelezh ? Poent e vefe d'an dud kompren na cheñcho ar bed nemet gant kenlud an holl, ma chom ar galloud pe an dieubidigezh gant un darn eus an dud nemetken e chomo kamm ar bed ha ne vo ket gouest da vont gwall bell. Setu evit klozañ va fennad un c'hrenn-lavar skouer :

"Ro deskadurezh d'ur gwaz hag az po deskat un den. Ro deskadurezh d'ur vaouez hag az po deskat ur bobl a-bezh". Ur spi, un het da vianañ.

Barbra Kerien

BERR-HA-BERR

Harz-debrñ

Krog eo ar brizonidi bolitikel euskarat e Herrera de la Mancha (Spagn) gant un harz-debrñ evit o gwirioù, a-enep d'ar rener a glasse sevel ur GAL, gant prizonidi a wir boutin, hag o lakaat da lazhañ an Euskariz. En toull-se emañ ivez Jean-Philippe Casabonne, hag eñ o yunañ ivez ■

Anne Driollet

Harzet eo bet ar plac'h yaouank-se, 25 bloaz dezhi, e Baiona, d'an 10 a viz Ebrel, tamallet dezhi bezañ roet bod d'ur repud euskarat, ha setu hi bac'het e Fleury-Merogis ■

Gartzia Mertzan

Laosket eo bet da vont digastiz ar paotr-se gant Lez-Varn an Audiencia Nacional d'an 9 a viz Ebrel, goude ma oa bet roet da bolis Spagn gant ar C'hallaoued war-lerc'h 3 bloaz toullbac'h e Bro-C'hall ha 9 miz e Bro-Spagn ■

Danvez-skarzhañ

Tapet eo bet e Bourdel Ernesto del Arco gant ar bolis c'hall. Tra a-enep dezhañ, met abaoe 10 vloaz emañ polis Spagn o c'hortoz anezhañ ■

EGUNKARIA : HUÑVRE BRO-VREIZH ?



Ganet eo Egunkaria, ar gelaouenn berrdezek nemet a implij an euskarag nemetken, d'ar 6 a viz Kerzu 1990. Bendez e vez moulet 30 000 skouerenn anezhi hag a vezont kaset dre Euskadi a-bezh (Stad-C'Hall ha Stad Spagn).

Lasarte e-kichen Donostia (Gipuzkoa) eo penn lec'h ar gelaouenn. Eno a labour ar skipailh-skridaozañ kreiz hag e kaver servijoù an ampled ; moulet e vez ar gelaouenn war mekanikoù ar gelaouenn Egin e Hernani. E Donostia e kaver ar servijoù mestraturrel ha bruderezhel. Dispartiet eo ar skipailhoù-skridaozañ etre peder kreizenn dishañvel : Bilbo (7 den), Gasteiz (3 den), Iruña (3 den) ha Baiona (3 den).

Ur gelaouenn 32 bajenn enni eo Egunkaria e-lec'h e c'heller kavout keleier lesseurt eus ar bed en e bezh koulz hag ar re a denn kentoc'h da Vro-Euskadi.

A om poblek eo Egunkaria. Tost da 11 000 a dud o deus roet skouz evit krouiñ ar Gervredigezh Dizan (S.A.).

N'eo ket ur vuhez aezet hini Egunkaria abalamour da statud skort ar yezh vinorelaet a implij ar gelaouenn ; darn vrasañ poblañs euskadi ne oar ket lenn yezh ar vro.

Un atoud bras ha deus padal, da laret eo he c'hoant kenderc'hel da labourat evit dazont yezh ha sevenadur ar vro, hag abalamour da gement-se e vez skouezet ar gelaouenn gant meur a emsaver. Distag eo Egunkaria diouz an holl gevredigezhioù foran ha diouz an holl strolladoù politikel.

Abaoe ma teuas ar-maez evit ar wech kentañ e vez embannet frank enni mennoziou a bep seurt liv.

Dont da vezañ ur benveg lizherennegezh, benveg eleduz hag amevet ar c'henera-avremañ, eo goaneg Egunkaria.

Robert Baxter, diwar Egunkaria

(folenn vruderezh a viz C'hwevrer 1991)



Dilennadeg

Txomin Arrambide, un Navarrad eus Euskadi an Hanternoz a zo da eil war listenn Herri Batasuna e dilennadeg "rannvroel" parlamant Iruñea, kêrbenn Navarra (Euskadi ar C'hreisteiz), evit unvaniezh Navarra hag unvaniezh

Euskadi. Sur eo da vezañ dilennet. Met sur eo n'halla ket kemer e sez. Etre 1527 ha 1530 e voe rannet Navarra Izel (en Hanternoz) ha Navarra Uhel. E 1620 eo e voe staget Navarra Izel ouzh ar rouantelezh c'hall ■

BOEST AR SKEUDENNOU

UR SELL WAR AR SKINWEL BREZHONEK

D'iv abaden 'm eus gellet pakañ e-doug ar miz, ar pezh n'eo ket fall, boaz ma on da vezañ war an hent pe e-kreiz un emvod bennak d'ar Sadorn goude kreisteiz.

● Frañsez Favereau, a c'haller gwelet ur wezh ar miz evit un abaden lennegezh ha kaniri pe/ha sonerezh, en doa gouestlet abaden ar 6 a viz Ebrel da enklask Broudic war ar Brezhoneg. 7 den en doa pedet da reiñ o soñj war an enklask-se a c'haller kavout war niverenn miz Meurzh Brud Nevez(1). Fañch Broudic e-unan, an ao. Kervella, sosiologour ; Gi ar C'Horr, kelaouenner e R.B.I. ; Yann Jestin, prezidant an dilennidi vrezhonek ; Ronan Huon, embanner Al Liamm, an ao. Cormerais, en anv ar rektoriezh hag Alan Bienvenu, rener an abadennoù brezhonek war FR3. An ao. Cormerais, a gava din e oa aet war e leve, n'en deus graet nemet gouelañ o titamall d'e implijer (e vestr, kentoc'h) stad C'Hall hag o tamall da bobl Breizh diskar ar Brezhoneg. "Mantret, souezhet, rangalonet, diskalonnekaet, gwalskoueriet on. Gouestlet em eus ma buhez d'ar yezh. Ar vretoned n'int ket bet rediet da vont war ar Gallag. Dizenor eus evit ar boblad". Setu ar pezh a voe klevet gantañ. Ar vuoc'h, ar simbol, ar vezh ; huñvreoù un nebeut emsaverien ? Ar skol, ar skingomz, ar skinwel, ar melestradur e Galleg penn da benn ; n'eo ket ur redi da vont war ar Galleg ? Eürusamant, ao. Cormerais, ez eus tud all estregetoc'h o deus gouestlet o buhez d'ar yezh en ur mod all. Ha dre zegouezh eo ma n'en doa ket Frañsez Favereau pedet un emsaver gouest da respont fraezh da Gormerais ? Gi ar C'horr, hag a vev diwar ar brezhoneg, n'en deus tamm spont ebet war netra, na war amzer da zont ar yezh, na war he lec'h er skinwel hag ar skingomz. Evit Yann Jestin eo "pase point ober un dra bennak", war tachenn ar c'helienn

"Brezhoneg e pep skol", ar skinwel "ur chadenn e brezhoneg" hag ar panelloù. Evit Alan Bienvenu eo "dav gouzout petra ober get ar brezhoneg, lâret sklaer an traoù, kavout kalz muioc'h a vrezhonegerien en tele". Ronan Huon, dre vennozh, a respontas da Gormerais e vez doujet muioc'h da wiriou an divroidi, gwelet lizher ar rektoriezh a-zivout kelenn o yezh er skolioù, eget re ar Vretoned e Breizh. A-bouez e voe klevet ur sosiologour, an ao. Kervella o tisplegañ e oa deuet ar Brezhoneg da vezañ ur yezh komzet nemet er familh ha war ar barrez. "dav e vefe komz Brezhoneg e lec'h all, e pep lec'h evit ma vo en-dro yezh ar gevredigezh". Un divz fonnu eta, daoust da bep tra, renet gant Frañsez Favereau en dije gallet ober ur gouleñn (a voe en enklask) da Fañch Broudic ha da C'Hi ar C'Horr : "Ha komz Brezhoneg a ra ho pugale ?".

● Abaden an 13 a viz Ebrel a voe a bep seurt enni. Kamera fri-furch a vez fentus pourlisañ daoust d'e vlaz a gozh. Met petra a faot deoc'h, aeooc'h eo kavout brezhonegerien war an oad eget re yaouank.

Ar vugale a adkavas ivez an Ensellour Gadjet. Paour-kaezh bugale, treut ar geusteurenn evite. Poent bras e vefe dezhe kavout un abaden evite o-unan, d'an nebeutañ un eurvezh ar sizhun evit kregiñ ; ne tefe ket bezañ re ziaes na re goustus. Ur pennad dudi gant sonerezh Ar Re Yaouank, Bernez Tangi hag E.V. hag e voe ur film evit echuiñ an abaden. "Ar marc'heg glas" gant Franco Calafuri diwar unan eus koñchennoù mamm-gozh Koulizh Kedez. Na mat, na fall evel al lod brasañ eus filmoù FR3 e brezhoneg.

Gwenael Caradec (1) : Brud Nevez, Nnn 143, miz Meurzh 1991, 6, straed Beaumarchais, 29200 Brest.



SAV-POENT

"PET BREZHONEGER, FAÑCH ?"

Gwech ebet c'hoazh, ma 'm eus soñj mat, ne oa bet bodet tud e-barzh "Chadenn ar Vro" (war FR3) en-dro d'ur studiaden, a-raok abaden ar Sadorn 6 a viz Ebrel, gouestlet penn-da-benn d'an enklask "kaset da benn gant Fañch Broudic ha TMO-Ouest" a-zivout implij ar brezhoneg ha niver ar vrezhonegerien.

Den ebet eus an INSEE, ha koulskoude o deus soñj lennerien Bremañ e oa an INSEE, da vare an niveridigezh-poblañs, o prometij sevel un enklask diwar-benn niver ar vrezhonegerien. Pelec'h eo chomet sachet ar promesañ-se ne vo lavaret en abaden, siwazh.

250 000 brezhoneger

O vezañ ma n'eo ket enklask Broudic un "niveridigezh" met ur "sondador", em eus poan o kompren penaos, goude goulenenna 1000 den, e c'haller kavout 250 000 a dud o komz brezhoneg. Din-

me n'eo ket gwall skiantel ar seurt taolioù-gwalenn-hud, ha tostoc'h ouzh ar relijion eget ouzh ar skiant e kavan ar sondadurioù. Diwall zo d'ober ouzh ar sifroù-se, pa vefe hervezo 15 000 den o lenn brezhoneg ; hep prenañ levr na kazetenn ebet ?

Tostoc'h ouzh ar wirionez emaoimp gant an 250 000-se moarvat, eget gant ar 500 000 pe 800 000 a vezer boas da glavout abaoe re ball amzer. Ha digreskiñ an niver-se a vo d'ober bep bloaz !

War an diskar emañ niver ar vrezhonegerien, eta. War he zalorù emañ o yezh ? Aze emañ an dalc'h.

Feiz, mantret e oa, sur, kouvidi Frañsez Favereau o welout an diskar-se. An holl, ma'm eus soñj mat, nemet lagad ar skiant en abaden an Aotrou Fañch Broudic.

Daoust petra zo kaoz d'an diskar-se ? "Ar skol", eme unan. "Ar media", eme egile, "ar vrezhonegerien" eme unan all. "Dav eo deomp goulet petra gobar", eme rener FR3. Uhel e nije ar preder.

Ankouaet ar stourmerien


Paogwir ne c'helle ket ar ministr, pe ar Rektor, dont moarvat, an hini a oa pedet Jean Cormerais, da reiñ meuleudi d'ar stad evit he labour-skoazell d'ar brezhoneg. Den ebet evit e ziskar : tud a-zaore a oa, ha ne oa bet kouvid dan eus Diwan na kelenner ebet goust d'e laakañ da lonkañ e zichekadennoù : diouz e glavout e vefe ar stad o klask saveteiñ ar brezhoneg en desped da youl kontrol ar Vretoned ! Ger ebet diwar-benn yunù Michel François ha Yannig Baron, eveljust.

Ha diwar-benn ar panelloù-hentoù, ken brav all. Diwar youl an dilennidi e vleuniot war hon hentoù bremañ ! Ger ebet diwar an dud a oa bet kaset d'al lezioù-barn evit bezañ livet panelloù pa ne oa tamm brezhoneg ebet wamo. Hag ur gwir da respont a vefe roet da dud SAB gant FR3 ?

Ur gaoz vras etre tud seven e oa. Diwar-goust ar gwir gudennoù. En enklask e oa ur gouleñn : "Ha komz a ra brezhoneg ho pugale ?". Ne oa ket hemañ : "Ha komz a rit brezhoneg ouzh ho pugale ?". Sed ar gouleñn a ranke Favereau ober ivez ouzh e gouvidi. Kenteluis e ve bat o respontoù ... Ha desket hor bije un dra bennak diwar-benn mignoned vras hon yezh vhan.

Herve Dizezon
① Etre 500 ha 1000 skwerenn eus pep levr brezhonek a vez embannet hep mui ken.

KANNADED BREIZH E BREUJOU EUROPA
1, 2, PE 24, POUEZ BREIZH E-SKOAZ BRO-BARIS



Gant Ministrerezh Gall an Aferiour Europeat ez eus embannet un toullad kieroù eus un dastumad anvet "Clés pour l'Europe", unan anezho anvet "Parlement Européen : Mode d'Emploi", a gaver ennañ kement tra a zo da c'houzout diwar-benn mont en-dro Breujoù Strassburg, ha chomlec'hioù kannaded ar stad c'hall.

War ar c'haier-se ivez e weler ur gartenn a ziskouez splann pouez Breizh en Europa, e-skoaz hini Bro-Baris : UR c'hannad hepken evit hon "rannvro" (Yves Cochet, kuzulier-kêr "glas" e Roazhon). DAOU evit ar Paydeuloar (e gwirione dilennidi eus Breizh, Bernard Thureau eus Añsiniz ha Martine Buron, maerez Kastell-Briant, o-daou eus ar P.S.), ha 24 evit Bro-Baris.

Europa, chañs ar rannvroioù, emezo !
Yann Leskildri

HA DISORJET HO POA TREBEURDEN ?
DISKLERIADUR AN IFREMER
DIWAR-BENN AR PORZHIOU BIGI-DUDI

"Savel ur porzh bigi-dudi a lak fotosintezenn an trowardroioù da zigreskiñ, a dag loened an donvor, a ziskar pratelloù foñs ar mor. Ar ravanellou a'ch advesk gant an dour ar saotradennoù bet kuzhet ar fank. Ur porzh bigi-dudi nevez a cheñch temperadur ha kementad-holen an dour. E-barzh studiadennoù an noazadurioù ne vez ket kontet an 40 annaz nevez dre zevezh-arad a zour, gant ar saotradennoù boutin a vannont bemdez. Ur vag 10 m. a daol 300 g. an deiz a zanvez toksek, hag ar sevelkerioù tro-dro d'ar porzh a saotr an dour c'hoazh ouzhpenn ..."

Diwallomp neuze ouzh raktresoù "marinaoù" e Sant Maloù, Kast, Frehel, Dahouet, Lannuon, Rosko, Plougerne, Fouenant, Douarnenez, Pirniag, Lokireg, an Aber Wrach, Kleder. Na zisoñjomp ket Loktudi lakaet war an douar noaz ha beuzet dindan ar fank gant he forzh bigi-dudi c'hwitet, ha mirop ouzh Trebeurden da vezañ betonet.

KENDIVZ E BARSELONA
DREM AN DIVYEZHEGEZH C'HALL

Pedet e oa Jean-Marie Bressand, diazeour ar gevredigezh "Le Monde Bilingue" da gemer perzh er c'hentañ Kendivz Etravroadel a-zivout al liesyezhegezh en Europa, dalc'het e Barselona e penn-kentañ miz Ebrel. Soñj o deus lod achanomp eus e pennad anvet "Sauver les langues régionales" a oa bet embannet e-barzh "Ouest France", ur bloaz zo bennak.

N'eo ket menozioù digor a gaved er pennad-se o deus degaset brud da Jean-Marie Bressand e Katalonia avat. Dilenn a reas enno "yezh an drevedannerien" ha sevel a-enep da ziflannerien ar yezhoù minoret, ken e voe youc'het warnañ, ha n'hallas ket derc'hel gant e brezegenn dirak 700 a yezhourien en o zouez maer Barselona ha prezidant Breujoù Katalonia.

E dibenn ar c'hendalc'h e voe degemeret ur "Manifesto a-zivout al liesyezhezh", hep ar mennadoù o doa kinniget ar challoaed da glask reiñ muioc'h a bouez d'o yezh : divasklet e oa bet ar jakobined dirak an holl.
Yann Leskildri

BANGLADESH

Da Vinistrez Kentañ e voe lakaet ar Begom Khaleda Zia, d'an 19 a viz Meurzh gant ar Brorener, Shahabuddin Ahmed, Dilennet e oa bet-hi d'ar votadegoù dieub kentañ er vro, d'ar 27 a viz C'hwevrer. Renerez ar Bangladesh National Party eo-hi ha skoazellet eo gant ar gostezenn islamek Jamaat-al-Islami. Maouez Kentañ o ran war ar vro e heuilh neuze hengoun gwregel iskevandir Indez - evel Sirimavo Bandaranaike e Sri-Lanka, Indira Gandhi e India ha Benazir Bhutto e Pakistan araoci.



Khaleda Zia

DIVODADUR AR PARLAMANT E INDIA R. GANDHI WAR HENT AR VELL

Divodet e oa bet al Lok Sabha -Kambrizel ar Parlament- d'an 13 a viz Meurzh gant an Ao. Venkataraman, Prezidant India. Tro ar 24 a viz Mae 1991 e vo dilennadegoù evit bodañ ar Vodadeg nevez a-rak ar 5 a viz Ewan. Roet en doa Shandria Shekar -Ministr Kentañ India- e zilez d'ar 6 a viz Meurzh. Chom a ralo war e bost o c'hortoz an dilennadegoù. Ar Parlamant-mañ eo an hini berrañ e istor politikerezh India. Savet e oa bet e miz Kerzu 89, goude fraezhidigezh strollad ar "Congress"(1) renet gant Rajiv Gandhi. E pemzek miz ez eus bet frammet daou c'houarnamant diwar vinoriezhioù ha kouezhet int en abeg da zizemglevioù.

Stabiled

Meur a strollad a zo war ar renk evit dilennadegoù ar 24 a viz Mae : war ar gudenenn a stabiled e tiazozo ar "Congress" e vruderezh ; "Diskouez a ra an darvoudoù nevez ne c'hell gouarnamant "digongressat" ebet d'ar c'hêl" V.P. Singh, avat, e penn Talbenn ar Vro, a venn gwareziñ ar beotien hag ar c'hastoù izel. Shekar a laka war-wel disoc'hoù e brantad berr a vell ; gwellidigezh aergelc'h ar politikerezh. Ar Bharatiya Janata Party (Hindour a-zehou) da echiñ, a venn kinnig 450 danvez-kannad (evit ar 544 sez a zo el Lok Sabha). Gant Gandhi ez ale ar maout, hervez. Met ne oar ket ha disoñjet o deus ar vouezherien ar gwallskouerioù an doa roet.

Geeta Camus

BRO-EUSKADI

D'ar Yaou noz 4 a viz Ebril e tevas e Montbrun (Angeli) ur garavanenn a dalveze da vurek-kenwerzh ur savadur-annez 22 rannidi annañ.

Antronoz e lizolojod arouez ar strollad Iparattarak livet war gel ur wezenn nepell diouz ar garavanenn.

Distrujet penn-da-benn eo bet ar garavanenn-vurek hag e kavod meur a damm stred en tro-war-droùliou kaset-digaset amañ hag ahont dindan pouez an darzhadenn. En derc'hent e oa bet deuet ul logell war ar chanter all e Angeli. Emañ peotrad Mari Robin o kas o enklask war raok an aferioù-se. A hend all, e anzasas Iparattarak oberennoù all a-enep d'ar Bastide Villefranche e Miarritz (Blaritz).

IWERZHON AN HANTERNOZ

Ur wech all c'hoazh en deus ar strollad IRA implijet un den dinamm evit kas ur vombezenn eus o ferzh. Ret 'oa d'ur vaouez kas ur vombezenn ganti betek ul logell-surentez e-keit ma chome he gwaz etre daouarnioù ar sturmerien.

Gallout a reas ar vaouez kas keloù d'an archerien, leuskel ar vombezenn war he lerc'h kent techel kuit.

Skarzhet 'voe an holl dud diwar al logell hag e tarzhas ar mekanik un ugent munut war-lerc'h.

Korsika

Da heul meur a vrest hir er Bodadva Broadel (da lâret eo Gall !), ez eo bet degemeret ar raktes lezennel o tennañ da statud Korsika. Degemeret eo bet gant niver brasañ ar voterien hag a-drugarez da emzourer ar Strollad komunour.

Bremañ e ranko bezañ gwirlikaet gant ar Sened a-rak ma c'hello bezañ kaset ur wech all d'ar Bodadva Broadel. Hep mar ebet e vo tapet Kuzul ar Bonreizh gant an enebiezh. Ha daoust hag-eñ e vo klevet mouezh ar Gorsiz en aler-mañ ? Sklaer evel daoulagad an naer, kôa ?

Ronan Barvek diwar Ekaliza niv. 257 (11-18 a viz Ebril 91)

8/13 a viz Gouere

Sizhunvezh-studi "d'ar pevar lamm" a vo gant Skol-Veur Breizh Uhel II, eus al Lun 8 betek ar Sadorn 13 a viz Gouere 91. Live 0 d'al live uhelañ a vo kinniget d'ar stajidi, 8 eurvezh kentel bemdez. Posubl eo d'ar stajiad goulenn digant e implijer kemer e karg frejoù ar staj (en anv ar stummadur dibaouez). Dindan renerezh Lukian Kergoat (kelennor er Geverenn Brezhoneg ha Keltiek), e vo ar staj-mañ. Kregiñ a raio d'al Lun vintin, da 9e rik !

Diwallit !

Poent bras eo deoc'h reiñ hoc'h anv m'ho peus c'hoant kemer perzh en devezhioù—studi—mañ ! Skrivit an abretañ ar gwellañ da Skol-veur Breizh Uhel II, Servij ar Stummadur Dibaouez, 6, ball Gaston Berger, 35043 Roazhon Cedex, pe pellgomz : 99 33 51 93

1100^{VE}T DEIZ HA BLOAZ

EMGANN KISTREBERZH

En 890 e roas lamm Alan Veur d'an Normaned a glaske aloubiñ Breizh. Lidet e vo ar bloaz-mañ 1100^{VE} deiz ha bloaz an emgann-se e Kistreberzh d'an 10-11 ha 12 a viz Mae. Priz Herve ar Menn a vo roet da François Marquer e-kerz al lid.

Roll an devezhioù

Gwener 10 • 9e g.m. - 10e 1/2 g.m. - iliz Kistreberzh, sonadeg bombard hag orglez gant Michel Fleury ha François Panhellou.

Sadorn 11 • 12e1/2 g.m. - ti-kêr Kistreberzh, emvod izili Juri priz Herve ar menn. 12e1/2 g.m. 2e1/2 g.m. - merenn e tavar Cadoudal. 3e1/4 - 4e1/2 - ti-kêr Kistreberzh, prezegenn : Trech Kistreberzh gant Albert Cousee ha François Marquer. 5e1/2 - 6e - lakaat bleuniou e-tal monumant Alan Veur e Kistreberzh hag ur brezegenn gant Prezidant Kevredigezh Breizh. 6e - 7e - ti-kêr Kistreberzh, priz Herve ar Menn roet da François Marquer gant Prezidant Juri ar Priz, heuliet gant ur banne a enor profet gant an ao. Maer ha kêr Gistreberzh (prezegenn) Maer Kistreberzh ha Prezidant ar Juri.

Sul 12 • 11e a.m. - 12e - iliz Kistreberzh, oferenenn vras.

Kemenn

KUMUNIEZH SANT ERWAN

EMGLEV AN TIEGEZHIOU

Sofijt am boa ober bodadeg an nevez-anzer d'an 21 a viz Ebril. N'neus ket bet tu, skoñhoù am eus bet. Ha koulskoude e oa bet embannet dija (er gelaouenn "Bremañ" da skouer).

Dalc'het e vo neuze d'ar Sul 12 a viz Mae e Rostren, e skol an Itron Varia (ar skol kentañ d'ez, strada Metz ; n'eo ket e Kampstal). Deuit niverus, unvaniezh a ra nerzh ...

KAMP KATEKIZ AN HAËV

Dalc'het e vo e Rostren, eus al Lun 5 a viz Eost d'ar Sadorn 10, e skol an Itron Varia (kentañ d'ez).

Degemeret e vo bugale etre 7 bloaz ha 15 bloaz, brezhonegierien hepken, barrek da gomz ar yezh. Rannet e vint e strolladoù gwaz ha oad.

Diouz ar beure e vo kentelioù, pourmenadenoù goude merenn, (mont da neuil ...) ha beilhaded goude koan. Gallout a raer en em enskrivañ adalek bremañ en ur skrivañ da : Yann Talbot, Presbital Rostren, 22110, Pg-96 29 01 55. Koustañ a raio ar c'hamp : 350 lur evit ur bugel, 600 evit 2, 750 lur evit 3. E dibenn ar c'hamp e vo lidet an oferenne e chapel ar skolaj. Ar vugale o deus an oad a c'hello komunial evit ar wech kentañ, pa ober o "disklariadur a feiz" ("Pask kentañ" gwechall).

Yann Talbot

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdoniou Vihan 29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur Skoazell adalek 130 lur

PARDON SANT GWENOLE LID EUS AN 9^{VE}T KANTVED

Pardon Sant Gwenole a vo lidet e Manati Landevenneg d'ar 1^{añ} a viz Mae '91. Hengoun al lid-mañ a deu eus pell ... an 9^{vet} kantved, hag adlakaet eo bet en e sav un nebeut bloavezhioù zo gant kumuniezh Landevenneg Oferenn 10e30 a vo lavaret penn da benn e brezhoneg ha laz-kanañ "Penn ar Bed" gant Muriel Chamard-Bois, telennour, a gimigo d'oc'h un abadenn kan ha sonerezh keltiek adalek 3 eur g.k.

GOUEL BROADEL AR BREZHONEG

GOUEL HA STOURM

Evit ar pempvet gwech e vo dalc'het "Gouel Broadel ar Brezhoneg" d'ar 17, 18 ha 19 a viz Mae e Karaez. Ouzhpenn an abadennoù sonerezh ha kantri e vo un diviz e Brezhoneg war al labour-douar e Breizh gant Pennoù bras ar sindikadoù hag ar strolladoù politikel.



Kinniget eo bet danvez ar vodadeg gant an aozerien, "Emgann", "Stourm ar Brezhoneg" ha "Brezhoneg a-gevret". Kalz a sonerien hag a ganerien a vo aze e-pad tri devezh gouel ha stourm ; en o zouez ar strollad rok Penleps, ar Pires hag ar Gembreiz Meic Stevens ha Bob Delyn. Adkavet e vo e-giz bep bloaz Naonediz ar strollad E.V. ha Jil Servat. Plijadur a vo ivez da adwelet Youenn Gwernig.

Labour-douar

Un dra nevez ar bloaz-mañ : un diviz war al labour-douar renet gant Radio Breizh Izel. Evit boaz e vo e Karaez al lod brasañ eus an embannerion brezhonek. Tro a vo da walet eta al levrioù, ar c'hazetannoù, ar c'helaouennoù, ar pladennoù ... embannet e Breizh. Ar gouren a gavo bod ivez ar bloaz-mañ er gouel a gas bep bloaz ouzhpenn 5000 den e Karaez.

Program

- Gwener 17/5 - 8e1/2 g.m. : iliz Sant Treveur, Yann Fañch Kemener, kanoù ; Kristen Nogues, kanoù ha telenn.
- Sadorn 18/5 - 9e g.m. : sal ar sportoù, Penleps ; ar Pires ; Bob Delyn ha Meic Stevens (Kembre).
- Sul 19/5 - 2e1/2 g.m. : sal ar sportoù, Archétype ; Jil Servat ; E.V. ; Bernez Tangi ; Georges Jouin ; Youenn Gwernig ; Kilg ha Fars.
- 10e : fest-noz vras, sal ar sportoù, gant Pennoù Skoulm ; Strobinnel ; BF 15 ; ha 11e1/2 : dindan tellenn : Kilg ha Fars ; Annie Ebrêl ha Dibenn ; Bernard Lasbleiz ...

Titour : Egin, plasenn La Tour d'Auvergne, 29270 Karaez, ☎ 98 93 37 43

Lennit

al liamm

Koumanant bloaz 120 lur (studieren, tud dilabour 100 lur)

Skrivañ da AL LIAMM 16 stradaed des Fours & Chaux 35400 - SAINT MALO -

Lizhiri 2
 Ar Gurded 3-4-5
 Lituania 6
 Breizh ha Lituania 7
 Ewroskol 8
 Iwerzhoneg 9
 Welcheg 10
 Nav milion 11
 Merc'hed er bed 12
 Euskadi 13
 Boest ar skeudennoù 14
 Berr ha Berr 15
 Mesk divesk 16
 Gouel Broadel 17
 Relijion 18
 Gouel Européades 18
 Kemennadennoù 19
 Manifestadeg 20

Ar pennadoù gant Erwan Tranvouez - Per al Lez - Joel Donnart - Silvi Donnart - Helena Riou - Alan Heusaff - Andrew Touchet - W. A. Bouzart - KAB - Radio Bro - Brbra Kerien - M.K. - Robert Baxter - Gwenaél Caradec - Herve Dizezon - Yann Leskildri - Geeta Camus - Ronan Barvek - Lena Louarn - Yann Talbot - Loeiz Mahe.

Luchskudennoù gant Telegramme - Nouvel Obs. - O.F. - Lena Louarn - Diwan - Anna-Vari Chapalain - A. Malinauskas.

Skoazell difaziñ gant Olier ar Mogn - Doming Jolivet - Herve ar Bihan.

Maketenn gant Jean-Michel Roynard ha Lena Louarn

Renez BREMAÑ : Lena Louarn.

Moulet e Ti moulezezh OSCR

Skrivit e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, keleier, kemennadennoù ha luchskudennoù a-raok ar Sadorn 20 a viz Mae ! (Pladennigoù PC pe Mac degemeret mat ...).

**SKOAZELLIT BREMAÑ,
 LAKAIT HO MIGNONED
 DA GOUMANANTIÑ !**

EUROPA E ROAZHON

**6000 DEN, 200 STROLLAD
 E STRAEDOÙ KERBENN BREIZH**



28vet gouel broadoù Europa a vo dalc'het er bloaz-mañ e Kêr Roazhon etre ar 17 hag an 21 a viz Gouere 91.

A-bep-seurt abadennoù sonerezh, dañs, kan a vo kinniget d'an arvesterien e-kerz ar 5 devezh gouel. Un dibunadeg vras a 6000 dan, gwisket e giz o bro, a vo tu da welet ivez e straedoù kreiz-kêr Roazhon. Un diskouezadeg a vo staliet er c'hoc'h da ziskouez holl gouelloù an "Européades" dibae 1964 betek an dañs a-hiziv.

Evit klozañ ar gouel e vo graet ur c'hendiviz-forum diwar-benn tam : "Dazont sevenadurioù pobloù Europa".

Kemer a raio perzh kevredigezh UPRAEB (Unvaniezh kevredigezhioù breizhek Bro Roazhon) e meur a abadenn dañs ha sonerezh, ha derc'hel a raio ur stal-kelaouiñ a-hed ar sizhunvezh.

Kenaezet eo an Europeades gant kevredad Kendalc'h

UN DROIAD WAR MENEZ-ARE

Kinnig a ra deoc'h ar gevredigezh "Tro Menez Are" ur bourmenadenn er Menez Are d'ar Yaou 9 a viz mae adalek 7e30 (minn, eveljust). Teir zroiad a vez kinniget d'an dud kalonek : 10 km, 20 km ha 40 km (na zisoñjit ket ho potoù-bale !). Duet a vo betek 4eur endervezh, ur pred a-feson ('giz ar maezioù) da 6e30 abardaz, ha fest-noz ('giz ar menez) adalek 9e noz ! M'ho peus c'hoant mont da avellou Menez Are, kaout plijadur gant kerzherien a-bep korn ar Vro pellgomzit an abrotañ ar gwellañ da "tro Menez Are", 98 78 08 10 pe 98 68 86 19. (Priz : 100 lur evit an devezh).

DIWALLIT !

**Devezh dorioù digor a vo d'ar Sadorn 25 a viz Mae 1991
 Adalek 11e betek 5e**

gant
 Skol Diwan Roazhon

Posubl e vo gweladenniñ an ti-skol, kaout un emgav gant ar skolaerezed, ar gerent, sellet ouzh un diskouezadeg klenket brav diwar-benn buhez Diwan, ha pakañ ur banne digor-kalon da 11e30 !

96, kanol Sant Varzhin
 35700 Roazhon
 (kroaz-hent Sant-Malo - ball Chezy).

YEZH
UR FAZI HEGASUS



Evit studiañ ar yezh ez eus binvioù n'haller ket tremen hepto, ar yezhadurioù da gantañ-pann. Ma n'emañ ket ganeoc'h c'hoazh "Yezhadur Bras ar Brezhoneg" gant Frañsez Kervella (Al Liamm), hastit buan d'e breñañ ha d'e zeskiñ dindan evnor, eveldon, pa oan yaouankoc'h. Gwir eo on krog d'ankounac'haat, gant an oad, ken e rankan digeriñ al levr adarre a-wechoù ...

Sed am eus graet, hegaset evel ma oan, gant ar bomm-lavar-mañ a gaver ken stank e pennadoù Bremañ : an ti-mañ-ti, hag all. Ha gwall alies gant ur fazi.

An ti-mañ-ti ti, a skrivañ Kervella. Ha nouze, an dra-mañ-ti dra, ar c'hi-mañ-ti c'hi, gant ar c'hennadur evel-just goude ar ger-mell. Sklaer ? Ma ne gredit ket, kit da welet hoc'h-unan (p. 294-295), tud yaouank.

Ha na lakit ket ken ar fazi dindan ma daoulagad ! Kompranet hoc'h eus ?

Fañch ar Mestr

**KOUMANANTIT BUAN :
 150 LUR / BLOAZ**

**ESTREN-STAD 200 LUR
 12 NIVERENN**

**KOUMANANT-SKOAZELL
 ADALEK 200 LUR**

**8, STRAED HOCHÉ,
 35000 ROAZHON**

KINNIG-LABOUR

klask zo war-lerc'h :
 ur c'helenner Galleg-latin,
 ur c'helenner Saozneg,
 ur c'helenner Brezhoneg,
 ur c'helenner matematik
 evit

Skolaj Diwan Roparz Hemon,
 bloavezh skol 91-92.

skrivañ da z**Diwan - Burev kreiz,**
 29870 Treglonou + C.V. ha lizher emginnig.



Skolajidi ar 4re klas - bloavezh skol 90/91

**Levrioù
 Nevez deut er-maez !
 "RUZ-BEV"**

gant Paol ar Meur
 e dastumad SKRID,
 renet gant Gwendal Denez (115 pajenn)
 Teir danevell a vo kavet el levr-mañ :
 E-kreiz ar moked, Superemsaver,
 ha Fo ar su pellañ.

Ul levr a lennot gant kalz dud ha plijadur !
 Skeudennet kaer eo ar skrid
 diwar dorn Jord ar Meur.


Skrivañ da : Mouladurioù HOR YEZH
 Tereza Desbordes

1 plasenn Charles Peguy - 29260 Lesneven.

Evit ma c'hellfe kenderc'hel

DIWAN

gant he hent,
evit difenn kelennadurezh hor yezh
MANIFESTADEG VRAS



d'ar Sadorn 22 a viz Even -3 eur-
e KEMPER